

PEDEN DA SANT VIZANT

VAR TON : *Piou lavaro pebez glac'har.*



O Sant Visant, taolit eur zell
Euz barr an Env ouz Breiz-Izell,
Ha tenerrait hor c'halonou
Ma selaouimp mouez an Aotrou.

O kimiada euz hon tud koz
Evit monet d'ar baradoz,
C'houi lavare: « Bezit fidel
Hag ho po bepred va skoazell. »

Na ped, siouaz! zo troet fall
A oa kristenien vad gwechall,
Oc'h heuilh plijaduriou direiz
O deuz enn-o mouget ar feiz.

Tennit ar paourkeaz dianket
Euz skilfou lem an drouk-spered,
Astennit ho taouarn d'eomp holl
Evit miret na 'z imp da goll.

Rag pa deuio an deiz euzuz
Piou na greno dirag Jezus?
Deskit d'eomp ober pinijen
Hag hor bleinit d'ar sklerijen.

Klevit hor mouez, Sant benniget,
Dirag ho skeuden daoulinet,
Aman dirag ho relegou
Ni ginnig deoc'h hor pedennou.

IMPRIMATUR :

Guitalméze, 15 a viz Mae 1925.

P. JONCOUR,
Vik. vras.